

Dastumad Pennwern : dormskrid 89

47. PERINAIK AR MIGNON

(folленнou 153 - 155)

Er bloaves pevar c'hant pemzek a pevar ugent
 Eus arruet eur malheur er ger a Lanhon,

Gant eur serten plac'h iaouank
 E voa o chervicha en eun hostaliri
 Hag e deveus konvertisset kals a dud a fesson.

Gant daou maltoutier iaouank ho c'houllen da goania
 Evit passeal ho faveur da neum divertissa.

Po doa drebet hag evet hag ho skoden peet
 Har vates Perinaïk o deveus goulennet
 D'ho c'hondui dar c'he.

Ouman zo eur c'hreg onnest, karget a vadelez
 A krogas en he letern ag en roas d'he mates.

Pa voant ia eur penad inkartet dei o deus lavaret
 Deut ganeom-ni, Perinaïk, deut ganeomp n'hi dom ti
 Ni reïo deoc'h da tava demeus tri sort gwin.

O sallokras, otrone, demeus ho gwin gwella,
 E ti va mestres pevar, pa garan, he heffan.

Ar ça 'ta, Perinaïk, a c'houi a permette
 Nag or lesel ni breman da ober on bolonte ?

O sallokras, otronnet, na ne permettan ket
 Nag o lesel c'hwi breman d'ober ar seurt pec'het.

Me a meus eun eont belek er ker a Lanhon
 A ma kleffe kement-man a ranfe e galcn.

Hag en mond unan aneze ag e distrei outi,
 Hag en lakat he guinou he choug e c'hil dezi.

Asa 'ta, Perinaïk, mouchit-tu ho letern
 a lazit ho goulou
 - Penos alfen me ho kas d'ar ger
 Pa ve mouchet va letern, lazet va goulou skler.

- 130 -

Ouman zo eur c'hreg onest karget a vadeles
A chomas var ar balle da c'hortos e vates

A chomas var ar balle eun darn dimeus an nos
Ken a voa sonnet diveur goude an anter nos.

Ar ça 'ta, otrou Kommissair, c'houi a gousk disso
Ar vates Perinaik er ger na erru ket.

Ounes zo eur viñores a zo pel zo ganem
Hag a renkin da renta en beo pe en maro

Sevel a ra an autrou Kommisser ia allumi he c'hou
Da vond da glask he mates partout dre ar ruiou.

En tall kouent Sant Joseph e neus e c'havet maro
He letern en he c'hichen hag he goulou beo.

Benos Doue var da ine, Perinaik ar Mignon
Te a voa eur plac'h onest hag eur plac'h a fesso
Brawa plac'h a valeche var paveou Lanuhon.

En illis Santes Anna e medi he foltrêt
He letern en he c'hichen hag he goulou marvet.

~~~~~  
VVVVVVVV

Jannet Puill, 13 janv. 1851

VVVVVVVVVVVVVVVVVV